

Troude ha Milin : Ar marvailher brezoneg pe Marvailhou brezoneg, dastumet gand ar horonal **A. Troude** ha **G. Milin** (ar galleg a zo dirag ar brezoneg). Brest 1870.

Notennou : Modernnaet eo bet an doare-skriva. N'eo ket gwir e vefe galleg e-barz. Skrivet eo gand an dorn al leor a zo bet prestet din gand Skol-Veur Vrést.

Troude : Brést 1803 – Brést 1885). Levezonet eo Milin, gwechou 'zo, gand ereadurez ar galleg.

*

Benedisite

Benediste n'oa nemed seiteg vloaz pa varvas e dad digantañ, ha setu-eñ e-unan-penn war an douar, hep kar na par ebed ken.

Ma teuas dezañ eur froudenn da vond da foeta bro.

«Marteze, emezañ, o weled ar marvailhou er broiou all, va glahar a dremeno buannoh. Evid amañ ne ran nemed dizeria bemdez.»

Hag o lakaad eur horn-bara en eur bisah ha kemered penn-baz e dad, hag en hent en avañtur Doue.

P'oa bet evel-se taol da vor, taol da zouar, eur maread deveziou, e tegouezas e-tal eur hoad braz, ha Benedisite e-barz da zebri eun tamm en disheol ha da ziskuiza, ar paour-kêz !

Skuiz-marzo e oa, na deo souez, ker yaouank all ma'z oa ha divoaz diouz ar vicher.

A-veh ma oa bet debret ar genaouad kenta gand Benedisite, ma welas eun torad loened mud en-dro da eur horv maro, ker sioul ha tra hag evel sebezet-oll.

“Daoust, emezañ outañ e-unan, ha dre amañ ema ar hiz gand al loened da zebelia ha da akosti ar horvou maro evel gand an dud en or bro-ni ?“

Eur re benang a welas Benedisite hag a lavaras d'al leon :

« Mestr, setu a-hont eur gwaz hag a dennfe marteze ahanom a baourentez ? »

« Gwir a-walh a levez, eme al leon ; kee d'ar red eta, levran, d'e gaoud ha lavar dezañ dond amañ da weled. »

Benedisite n'oa ket chomet da varhata hag a oa eet euz ar hoad buannoh eged n'oa deut e-barz. Hogen hebdale e oe tizet gand al levran, hag eñ en-dro gantañ.

« Ni, eme al leon, a zo nehet-marzo or-pevar amañ, o klask gouzoud penaoz dond a-benn da ranna mad ar preiz boutin-mañ etrezom or-pevar. Lavar deom eta penaoz ober ar rann-ze. »

« C'hwi, aotrou leon, eme Benedisite, a zo lemm ho skilfou ha pounner ho pao, distagit eta ar penn deoh diou ar horv-se. »

Gand eun taol dant hag eun taol ivin, al leon ne oe ket pell evid dihizouga al loen maro.

« Tennit bremañ ar houraillo hag ar bouzellou. »

Ar pezo a oe greet buannoh eged m'her lavaran deoh.

« Bremañ, eme Benedisite, distagit eur vorzed diou ar horv. »

Hag e oe greet en eur par berr.

« Me 'gav din, eme Benedisite neuze, ar penn a ve mad d'ar wenanenn a zo bihan ha mad da grignad, hag he-deus boued aze evid eur pennad mad. Ar houraillo hag ar bouzellou a zo diou doare ar sparfell. Al levran, a gredan, e ve mad dezañ tremen gand eur vorzed, hag an nemorant euz ar horv a zeu deoh-c'hwi, aotrou leon. »

Laouen 'oa pep hini anezo, hag an oll a ziskoueze a-walh en-doa skoet mad va den, ha peb unan da zailla raktal gand e lod, hep teurel evez ebed ken euz Benedisite. Hemañ ne houlenne ket well ; hag eñ dastum e zah hag e vaz, hag el leo adarre.

Hogen, pa oe torret o naon gand al loened gouez-se, al levran a lavaras d'al leon :

« Me 'gav din, va mestr, e vije bet deread deom rei eur pae bennag d'an den fur-ze evid ar pezo en-deus greet deom or-pevar. »

« Gwir a-walh a levez, eme al leon ; hast afo war e lerh eta, ha lavar dezañ dond amañ ma welim pe zoare gopr a ve ar gwella gantañ. »

Benedisite n'oa ket ohpenn eur halvadenn ahano, kaer en-doa bet lakaet herr gand e gammejou, ma oe tizet gand al levran.

« Va den mad, emezañ, dond en-dro da gaoud al leon diohtu a zo lavaret deoh. »

« Ar barrad terzienn-mañ a zo gwasoh evid ar henta, rag, eme Benedisite, al laboused dibluñv-ze n'o-deus ket kavet mad o lod, sur a-walh, hag en dro-mañ, allaz ! eo greet ganen da vad ! »

« Kleo 'ta, va faotrig-me, eme al leon, ni 'vije marteze en em gannet hag en em zraillet diwar-benn ar preiz on-doa kavet, anez da furnez-te, hag or joa ouz al lodenn greet ker brao dioh doare pep hini ahanom, a reas deom oll chom hep paea ahanout hag heb lavared bennoz dit, 'zo koantoh. Hogen ne welan ket brasoh torfed eged beza bougre. Lavar eta bremañ deom petra 'rafe mui plijadur d'az kalon da gaoud diganeom. »

« E-leal, eme Benedisite, ne dalv ket ar boan, aotrou leon, na ne oufen ket petra da houlen ouzoh ; re a vadelez hoh-eus, rag ne gav ket din e veh kalz pinvidikoh evidon-me, hini ahanoh ho-pevar kennebeud. »

« Kent a ze, eme al leon, mar tegouezfe dit kaoud ezomm ahanon, n'az-pezo nemed lavared ar homzou-mañ ; “Me 'garfe beza leon“ ; ha raktal ez i da leon. Ha pa'z-pezo c'hoant da zond da zen adarre, na'z-pezo nemed lavared : “Me 'garfe beza den“, ha kerkent e vezi den adarre. »

Al levran, ar sparfell hag ar wenanenn a lavaras heveleb tra da Venedisite.

« Bennoz deoh oll », emezañ.

Hag eñ en hent adarre, herr ennañ, en avañtur na vije galvet adarreda zond war e giz.

P'oa eet eur flipad mad a hent ahano, en em lakaas da gompren evel-henn :

« Daoust ha ne vije ket al loened-se oh ober goap euz a eun den ? Marteze a-walh, rag laouen-braz e oant ouzin, ha prezeg a reent evel tud. Perag eta n'o-defe ket ar galloud al loened-se da ober burzudou ? Avañturom da weled ; emichañs ne zegouezo droug ebed ganen evid êsaad. Me 'garfe beza leon, eme Benedisite. »

Hag eñ e leon ket kifinig¹ ha m'en-doa lavaret e her.

« Me 'garfe beza den. »

Hag eñ e den adarre.

« Dalv a unan ! emezañ, Deom adarre : Me 'garfe beza levran. »

Hag eñ eet da levran ker kifinig.

« Me 'garfe beza den. »

Hag e den adarre.

« Dalv a zaou ! eme ar paotr. Gwelom c'hoaz... »

Ma'z eas da sparfell ; ha dond adarre da zen ; ha mond da wenanenn, ha dond da zen adarre.

« Setu greet eun taol kaer gand eun den en e vuhez, emezañ. Kaerra bro eo houmañ ! Ne weler ket traou burzuduz er hiz-se en or bro-ni. Daoust pegeid e pado an dra-ze ? emezañ, en eur vond gand e hent. Deom atao en avañtur Doue. »

Hogen dond a reas e vara da veza enk hag e dreid da grignad, ar paotr kêz ! Inouet-marzo eo ivez dre ne anavez ha ne wel den.

Ma kompren mad da sparfell evid gweled gweloh an doareou, hag ober buannoh e hent.

« Me 'garfe beza sparfell », eme Benedisite.

Ha flip, flip, flap ! Eñ war-nij dreist ar gwez brasa hag o weled e-leiz a varvaillou nevez. Eur gêr a welas ivez.

¹ kifinig : ?

« Sell », emezañ, sebezet oll, rag biskoaz n'en-doa gwelet kemend-all a diez en eur vagad.
« Daoust petra eo an dra-hont ? »

Hag eñ da skei etrezeg eno endra ma helle.

Hebdale e plavas war skourr eur wezenn, e-tal leur-gêr, a-dost d'an douar, hag e lavaras :

« Me 'garfe beza den. »

Hag eñ da vale etrezeg porz-gwint kêr. Eno e kleve a bep tu eun trouz hag eun talabao efreizuz, ken a oa boudinnet e ziskouarn ; ha ne wele nemed tud glaharet ha gwisket e kañv.

Ma houlennas ouz ar henta den petra 'oa a-nevez dre eno.

« Anad eo, va den mad, n'oh ket euz ar vro-mañ, eme an den-ze, rag amañ an oll, braz ha bihan, a zo e kañv ha glaharet-braz, rag ar sort 'zo degouezet gand merh ar roue da veza debret gand ar zarpant a zo du-hont en eun enezenn e-kreiz ar mor ; hag an trouz hoh-eus klevet eo trouz an taboulinou oh inkanti piou bennag a yafe d'ar zarpant e-leh merh ar roue, en-defe e bouez a aour hag a arhant, hag an hini a lazfe ar zarpant a ve dimezet da verh ar roue ha lakaet da roue goude he zad. Ha den n'eo bet c'hoaz, na ne vezo, moarvad, diod a-walh d'en em ginnig. »

« Bennoz deoh, paeron, eme Benidisite, ha yehedou. »

War gement-se, Benidisite a yeas en eur horn-tro en eur lavared outañ e-unan :

“Bremaig me a welo hag a glevo meur a varvaill nevez c'hoaz.”

Hag eñ e gwenanenn da hoari tro kêr hag o klask lez ar roue.

He ne oe ket pell e welas soudarded e-leiz hag ar pennou braz a gêr en o faro, hag eun niver braz a dud oh heul ar roue hag e verh, eur maread a briñsed hag a briñsez en-dro dezi. Biskoaz n'en-doa gwelet Benidisite kemend-all a dud na ker glaharet.

Hag eñ da heul ivez beteg an aod.

Neuze ar briñsez yaouank a gimiadas dioh he zad, he herent hag he mignoned. Strakal a ree kalon an oll koulz hag hini ar briñsez, hag an oll a oa beuzet en o daelou, gand keuz da verh ar roue ; hag o-doa truez oh eur briñsez ker yaouank, ker koant ha ker reuzeudig.

Endra edo ar vag o regi mor, Benedisite ha lavared :

« Me 'garfe beza gwenanenn. »

Hag eñ eet diohtu e gwenanenn a nijas hag a blavas war eun tu pe du euz ar vag, ha war zigarez klask eun tamm kouiltron² bennag, ne ree nemed mond ha dond da ziverraad an amzer da vreh ar roue o selled outi.

Etretant ar vag a zouaras en enezenn ar zarpant, hag ar vartoloded en-dro kerkent ha m'oa diskennet ar briñsez euz ar vag.

Benedisite neuze a zeuas e den hag a lavaras da verh ar roue a oa mantret oh e weled eno :

« N'ho-pet ket aon na poan ebed, priñsez reuzeudig, emezañ, me a zo deut amañ evid ho tenna euz a skilfou ar zarpant, pe e vezo diêz-braz ober kement-se. Bezit eta fiziañs ennon ha grit kemend a livirin deoh ober. Deom bremañ da weeld peleh ema al loen garo-ze ha da glask an tu warnañ. »

Ma tegouezjont hebdale en eur maner koz n'oa e-barz nemeur a vad nemed eur gambrig pe ziou da aoza boued ha da zegemeret ar re a veze degaset d'ar zarpant da hortoz m'en-divije naon kig fresk.

« Goulennit kelou ouz al loen garo-ze, eme Benedisite, diwar-benn doareou an enezenn-mañ ha diwar-benn e zoare e-unan, ha goude e leverot din kement ho-pezo klevet gantañ. Me a vezo atao en-dro d'ar maner, ha kerkent ha ma tigorot prenest ho kambr, me a yelo enni. »

Neuze merh ar roue a yeas er maner da glask ar zarpant, hag a oe degemeret mad-kenañ, rag al loen kriz-se n'en-doa ket a naon na dienez a gig c'hoaz, emezañ.

Selled a reas oh ar briñsez yaouank, ha mousc'hoarzin zoken, ker koant e kave anezi ; hag evel p'en-divije bet truez outi, en em lakaas da varvaillad gand an dimezell. Houmañ ne

² kouiltron : ?

houlenne ket well. Ma lavaras dezi a gaoz da gaoz perag n'oa gellet den biskoaz dond a-benn d'e laza, daoust ma'z oa koz, ha kaer a oa bet êsa ober kement-se dre beb doare ardou.

« Rag, emezañ, va ene-me n'ema ket em horv ; er Spagn eo ema en eun dragon hag en-deus seiz penn. Hag a zo koantoh, hag e ve lazet an dragon-ze, me ne varvfen ket c'hoaz, rag euz e gorr, kerkent ha ma vije lazet, e teufe eur had hag a ve ranket da baka ; hag e ve lazet zoken, e teufe da nijal anezi eun dube, hag en dube-ze ez eus eur voulig ; ha ken na gouezo ar voulig-se war va fenn, biken ne hallfet dond a-benn ahanon-me. Rag-se e welit, priñsez yaouank, n'eo ket êz dond a-benn ahanon », eme ar zarpant rok ha kriz.

Kerkent ha ma hellas merh ar roue en em zizober euz ar zarpant, e redas d'he hambr ha mall ganti digeri ar prenest da weled ha Benidisite a vije dre eno.

A-veh m'oa digor ar prenest ha Benidisite er gambr diohtu.

« Ahanta, emezañ, kelou mad a zo ? »

« Gwella pez a zo, emezi, eo n'en-deus ket a naon. »

Hag hi mond ha lavared da Venidisite kement he-devoa klevet digand ar zarpant diwar-benn e ene.

« Komzit brao outañ atao gand a reot, eme Benidisite d'ar briñsez, ha mar tegouezfe dezañ kaoud naon, pedit hen d'hoh espern, hag evel-se a zevez da zevez, me hallfe kaoud amzer da zond a-benn euz e ene hag euz e gorr. Me 'ya raktal etrezeg ar Spagn, ha mar on-eus chañs, hebdale em welot o tistrei gand ar voulig vuzuduz-se a dle terri e benn d'al loen garo-ze. »

Ha flip, flip, flip ! Benedisite e sparfell war-nij endra 'helle, ha pa zeuas da skuiza ez eas e gwenanenn, kuit da zale e neb leh. Ne oe ket pell evid mond d'ar Spagn, hag eñ e den da houlenne kelou euz an dragon a glaske. Hag e oe lavaret dezañ ez oa eur pikol hini tost eno en eun toull don dindan an douar e-kreiz eur blenenn vraz.

« Daoust, eme Benedisite, ha ne ve ket kavet unan bennag da zond da ziskouez ar blenenn-ze din ? »

« Paea stard a rankot, va den, ha prezeg brao, ha gwall yaouank ho kavan, va mignon, evid beza ken hardiz hoh-unan. Evidon-me ne din ket ganeoh hag e rofeh va fouez a arhant din. »

« Livirir dit dihanna, eme Benedisite, dre be hent eo mond da gaoud ar blenenn-ze, ha me a roy gwerz ar butun deoh. »

Ha Benedisite ha mond e-unan-kaer beteg dor tour an dragon.

Hemañ, pa glevas anezañ o tond, a zeuas da gaoud genou e doull, hag a lavaras :

« Me 'ghev c'hwez ar hristen ! Piou a zo bet ken dievez da zond amañ ? Preñvig douar ! aon eh-eus-te na zeufe ket buan a-walh da dro da zond amañ, pe gollet eo da benn ganez ? Kee buan-buan en-dro na 'h-eus c'hoant da veza malet hirio gand va dent-me ; ha mar eh-eus mall d'ober anaoudegez gand va skilfou, n'eh-eus nemed dond e-leh ar henta a vezo degaset da zebri. »

« N'ez-pezo na va buhez-me na buhez den all ebed ken hiviziken, eme Benedisite ; klevet a rez-te mad ar brezoneg-se, loen euzuz ? Ma n'em-eus aon ebed razout, ha mar kerez warhoaz kenta ni a welo pehini ahanom eo ar gwella gwaz. »

« Ne vezo ket hir ar hrogad, eme an dragon, hag a vez-te golet a zir adaleg bizied da dreid beteg kern da benn, gand eun taolig pao e vruzunin ahanout. Eun tammig c'hwek a lip-e-bao a rafes evelato evid doare, va faotrig koant. Kenavezo warhoaz eta, d'ar poent a gari. »

N'oa ket distro Benedisite euz ar blenenn, m'oa eet ar brud dre ar vro 'oa deuet eun den yaouank a bell bro hag a oa eet dispont da gaoud an dragon. N'oa ken kaoz tro-war-dro nemed da glask gouzoud pe eñ a oa distroet Benedisite pe ne doa ket. Ha pa oe klevet ez ee an divroad yaouank-se d'en em ganna ouz an dragon, an oll a yeas etrezeg ar blenenn da weled an abadenn.

Pa oe degouezet Benedisite e-barz toull an dragon, e lavaras dezañ :

« Ahanta ! akolist, 'm-eus aon n'oh ket savet mintin da lamed ho paro ha da lemma ho kildent ? »

« Te ‘zo aze ken abred-mañ, preñvig douar, skuiz out eta gand ar vuhez ? Gand truez ouzit, ker yaouank all ma’z out, n’ez lezin ket pell en da dremenvan. »

« Lez da hoaperez, eme Benedisite, ha krogom... Me ‘garfe beza leon », emezañ.

Hag eñ en eul leon ar haerra.

« Bremañ, eme an dragon, e kavan ahanout eun tammig muioh a-zoare, hag e talv ar boan ober eur hrogadig gouren ouzit, da zigeri va skrin ha da zivergla va ivinou. Pell braz ‘zo ivez n’em-eus bet tamm kig leon a gavan ker mad. »

« Sko, pe me a skoio », eme Benedisite, diwar eur mare.

Hag o-daou o kregi yud.

An dragon a oe distaget eur penn dioutañ er frap kenta, da daou en eil krogad.

An dour a zivere diouz an daou loen.

An dragon a oa ruz-tan an daoulagadou er pennou a chome war e houzoug.

Al leon a oa korvigellet e lost war e dalier, hag e voue sonn war e ziskoaz evel reun kaled, hag e dreid hag e henou leun a wad.

« Karter³, eme an dragon, ahann da warhoaz ar poent-mañ. »

« Karter, mar kerez », eme al leon.

Hag an dragon d’e doull, hag al leon d’ar gêr da ziskuiza ha da lipad e houliou.

Antronoz, evid diverraad kaoz, an dragon a oe distaget tri benn all diwar e houzoug, hag a houlennas arzao adarre d’ar brezel ahann d’antronoz.

« Arzao, ma kerez, eme al leon, evidon-me n’on ket fêz. »

Kaer en-doa lavared hag ober goap euz an dragon, al leon kêz a veze gwallgaset evelato bep frapad, ha meur a daol dant hag a daol ivin a oa merket mad en e grohenn. Na deo souez ! an daou loen a oa ker gallouduz ma krene an douar dindano, m’oa spontet al loened hag an dud a-bell tro-war-dro. An taouarh a ziframment gand o ivinou a nije uhel en êr evel fulenn erh er goañv. Beb an amzer e kleved trouz skiltr ar skant euz an dragon o steki ouz ar vein pe ouz dent al leon. Leuskel a reent ivez youhadennou efreizuz a veze klevet a-bell ahano.

Evid lavared berr, antronoz al leon a zistagas ar seizved penn diouz an dragon. Hogen skuiz-marzo e oa ivez, ha darbet ‘oe dezañ beza gwintet e-unan er frapad-mañ.

Kerkent ha ma oe kouezet an dragon maro-mik war an douar, eur had a redas euz e gory, ha dipadapa, d’ar haloup ruz mar gouie, ker skañv hag eul lapous war-nij.

« Me ‘garfe beza levran », eme Benedisite.

Hag eñ war-lerh ar had, endra helle.

Ne eo ket hir an dale ma oe paket ar hadig kêz ; ha kernet ha ma oe maro, e nijas eun dube euz he horv.

« Patou⁴ ! patou ! », emezañ.

Hag eñ kuit, a-nerz e ziouskell.

« Me ‘garfe beza sparfell », eme Benedisite.

Ha yao war-lerh an dube.

Pa oe paket an dube ha digoret, e oe kavet ar voulig vurzuduz ennañ, ha pa oe deut da zen adarre, e lakaas ar voulig en e vouchouer. Hag eñ o houzoud⁵ n’oa mui netra d’ober eno nemed nemed paea e skodenn e ti e ostiz, ha yao buan-ha-buan da gaoud merh ar roue a dlee beza gwall nehet dre na zistroe.

Tud ar vro-ze a bedas Benedisite da chom eno, hag hen lakajont da roue, rag ne ouient penaoz ken diskouez dezañ o levenez hag o anaoudegez vad.

« Ho trugarekaad, eme Benedisite, n’em-eus amzer da zale ; kenavezo ha yehedou. »

Flip, flip, flip !... Hag eñ e sparfell etrezeg e briñsez yaouank.

³ Karter : galleg quartier, faire quartier.

⁴ Patou : ?

⁵ o houzoud : fazi a-viskoaz. “pa oueze“

Pa zegouezas e maner ar zarpant, edo merh ar roue en he frenest, beuzet en he daelou o lavared outi heh-unan :

“Daoust ha ne zeuio ket Benedisite en-dro c’hoaz ? Marteze eo bet lazeta, siwaz ! Mervel a rankin eta goude beza bet atant⁶ da vond ahann e buhez.”

« Sehat ho taleou, eme Benedisite, n’em-boa ket me lavaret deoh kaoud fiziañs ? Mad eo er bed beteg-henn. Setu amañ ar vourig vruzuduz ; hogen ganeoh-c’hwi amañ n’ema ket gwall vad an dro, a gredan ? »

« Tri devez ‘zo, eme ar briñsez, ‘eus savet naon du gand ar zarpant ; deh dreist-oll eo bet gwallgaset hag e ene a zo bet lazeta er Spagn. N’em-eus gallet herzel nemed dre va daelou ha va lubanerez, ha da beb mare emeon ouz e hedala da zond d’am debri. »

« Mar gellit eur wech c’hoaz, eme Benedisite, e gas dindan ar wezenn lore, war zigarez selled e benn dezañ evid ar wech diweza, me a vezo er wezenn hag a ziskenno goustadig hag a lakay ar vourig da goueza war e benn, ha setu... »

En devez-se, ar zarpant koz a lavarasa da verha ar roue :

« Priñsez kêz, n’on evid herzel ken, beh em-eus o chom war va ellou. Dare on da vervel gand an dienez hag ar gozni. Va ene o veza lazeta, me ‘zo ivez klañv-braz. Da zebri a ranakn bremañ, daoust ma’z out koant. »

Ar briñsez a lubanasa ker brao ouz ar zarpant, hag a droasa ker mad he homzou ma’z eas dihana ar zarpant ganti evid ar wech diweza dindan ar wezenn lore.

Lakaad a reasa penn ar zarpant war he barlenn, ha Benedisite, o veza diskennet goustadig, a lakaas ar vourig da goueza war benn ar zarpant, ha ker kifinig e kouezasa d’an daouar reud ha maro-mik.

« Deom ahann buan-ha-buan bremañ, eme Benedisite, da zispenn or roudou, en aon na ve eur zarpant all bennag dre aze. »

« Ya, c’hwi ‘lavar a-walh, eme merh ar roue ; na treuzi ar mor ? pa ne deus na bag na den ebed dre amañ nemedom on-daou. »

« Deom atao d’an aod, ha bezit dineh. Etreant me a yelo war-nij da gas ar helou d’ho tad ha da gerhad eur vag. »

A-veh m’oa degouezet ar briñsez e-tal ar mor, ma welasa eur vag o tond a-benn-herr etrezeg enni. Hag hi a lamm e-barz, hep he fedi, an daelou en he daoulagad ; daelou a levez ‘oant an dro-mañ.

Pa zegouezasa ar vag en douar braz, an aod hag an tevennou a oa goloeta a dud, o halon o tridal gand levez, hag e oe klevet diohtu trouz an taboulino hag an trompillou o tond a-raog ar zoudarded, ar roue, ar briñsed hag ar priñsez, hag an oll bennou braz euz ar vro.

M’ho lez da gompren al levez a oe eno, hag an daelou a levez hag an drid-kalon euz ar roue hag e verha, hag an oll, bihan ha braz. Ken a zegouezjont e lez ar roue. Ne glevet a-bep tiu nemed :

« Bevet merh ar roue ! Bevet an hini en-deus lazeta ar zarpant ha saveteet ar briñsez hag ar vro ! »

O klevet ar homzou-mañ ar briñsez a lavarasa d’he zad :

« Va zad kêz, emezi, me a zo souezet gand an den yaouank Benedisite en-deus lazeta ar zarpant. Ha ne zeu ket war va zro, na n’her gwelan e tu ebed ! Ha koulskoude em-eus lavaret dezañ ‘oan dezañ, me ha va oll vadou. »

« Piou eo ? pe ano eo ? Euz a beleh eo ? » eme ar roue hag an oll briñsed pa glevjont ar helou-ze. « Red eo e glask e pep korn a gêr hag euz ar vro, ken na vezo kavet. »

« N’ouzon ket hirroh egedoh-hu war an dra-ze, eme ar briñsez. »

⁶ atant : ? Marteze ar galled “attendant”.

« Mad ! eme ar roue, red eo lakaad diohtu an taboulinou e tro kêr hag en oll gêriou euz ar rouantelez da enkanti emañ o hortoz an hini en-deus lazeta ar zarpant, evid e zimezi gand va merh. »

Hogen Benedisite n'en em ziskuille ket atao, ar pez a ree kalonad da verh ar roue her hare kement ; dreist-oll pa zeuas, a-benn eun nebeud deveziou goude, eur hoz Kernevod gand e zah du da lez ar roue ha gantañ pennou an dragon en-doa dastumet er Spagn en eur vond da druillaoua. »

Kaer 'oe d'ar briñsez lavared n'oa ket hennez en-doa lazeta ar zarpant, ar roue a lavaras :

« Lavaret em-eus e timezjen va merh d'an hini he zennje euz a skilfou ar zarpant, ha setu emañ pennou an dragon gand an den-mañ, ha va merh a zo dezañ. N'on ket evid kredi e ve bet greet an taol gand den all ebed, pa ne zeu ket. »

Deiz an eured, merh ar roue a ouele druz o vond da eureuji gand ar hoz Kernevod trubard gwisket bremañ evel eur priñs ar haerra, eun dudi e weled, ha lorch ennañ da vouga.

Bez' edont o vond da lavared ar "ya" peurbaduz ; pa welas ar briñsez, en eur horn-tro, eun den yaouank heñvel oh Benedisite. Hag hi sempla diohtu.

An oll a oe glaharet hag a grene na vije o vond da vervel.

P'oa deut merh ar roue enni heh-unan, e lavaras :

« Me ne zimezin ket d'ar Hernevod trubard-mañ, hogen gand an hini a zo du-hont hag en-deus lazeta ar zarpant. »

Ma oe klasket Benedisite ha goulennet outañ ha gwir 'oa en-doa lazeta ar zarpant.

« Ya, emezañ, gwir eo ; hogen n'em-boa ket amzer da zastum pennou an dragon em-boa lazeta er Spagn gand aon na vije debret merh ar roue gand ar zarpant, pa vijen deut en-dro. Ha pa oe tennet ar briñsez euz a enezenn ar zarpant, e teuas em spered mond en-dro d'ar Spagn da glask testou euz an taol kaer em-boa greet eno, hag etretant ar Hernevod trubard-mañ a zo deuet amañ gand pennou an dragon lazeta ganen, ha darbet dezañ laerez ivez merh ar roue diwar va houst, rag gleb dour-teil on zoken kemend a herr a oa ennon o klask en em gaoud e poent, pa glevis an dro a oa c'hoant d'ober din. Evelato n'eo ket bet fin a-walh ar Hernevod kêz, rag n'oar doare n'eus deut gantañ nemed pennou hep teod ebed, ha me a gav din an hini a zo an teodou gantañ a dle bale en e raog. Mad ! setu-i amañ o-zeiz. Mar deo aviz, me houlen beza lakaet e-leh ar Hernevod. »

« E-leal ya, eme ar briñsez, rag deoh-hu eo ez on, me ha va oll vadou. »

« Bevet Benedisite ! bevet merh ar roue !, eme an oll en eur vouez ; hag ar Hernevod trubard d'ar maro ! »

Ar Hernevod paour ne lavare ger hag a oa ker gwenn hag eun tamm paper ; ha petra 'oa da lavared ?

An dud gand o hounnar hen taolas er-mêz a-daoliou treid, ha gras dezañ pa ne oe krouget.

Eur wrahit koz a oa eno e toull an nor, oh e weled o tremen, a lavaras d'ar Hernevod reuzeudig :

« Va mabig kêz, it adarre da druillaoua, ha n'ho-pezet morse c'hoant da dremen evid ar pez ne doh, ha livirit d'an oll, dre va zeod, e vezo anavezeta, abred pe ziwezad, o lealded pe o fallagriez ; rag gwir e vezo atao :

Dioh a reot
E kavot. »